



## Buzhug

Fichenn savet gant Silvenn Koant

### Evit piv ?

Adalek ar CE2 en ur sal vras pe er maez

### Talvoudegezh ar c'hoari

- > Anavezout ar sifroù ha lieskementadoù.
- > Bezañ aketus

### Mont en-dro ar c'hoari

Ur c'helc'hiad a c'hoarierien azezet.

Kregiñ a ra unan er c'helc'h da gontañ en ur lavaret « unan », e amezeg a gendalc'h en ur lavaret « daou », ha kendalc'het e vez evel-se da gontañ, pep hini d'e dro 1, 2, 3, 4, 5, 6,... met e lec'h lavaret an niver 7 pe ul lieskementad da 7 ez eo ret lavaret « buzhug ». Ret eo lavaret « buzhug » ivez evit an niveroù oc'h echuiñ gant ar sifr 7 (17, 27, ...)

Pa vez faziet gant ur c'hoarier e vez ehanet kontañ. Gortoz a ra ar c'hoarier en deus faziet e vefe echu ar c'hoari. Kroget e vez gant an niverenn unan, met en tu kontrol.

### Evezhiadennoù

\_ Evit kregiñ ar c'hoari e c'hell mestr ar c'hoari mont e-kreiz ar c'helc'h evit sikour da gontañ en ur heuliañ ar c'hoarierien gant ar biz.

\_ Lezennoù all a c'hell bezañ ijinet evit lavaret « buzhug ». Da skouer evit an niveroù lies da 9, pe c'hoazh pa vez kevatal hollad ar sifroù en niverenn modulo 9 da 7 (diaesoc'h)  
Ober gant forzh peseurt niverenn.

